

G U E R Z

VAR BUEZ SANT ROC,

Evit e hedi da implori graç Doue da deurel ur zell a visericord varnomp, ha d'hon dilivra diouc'h ar Vocen maleurus pekini a zistruch hon bro baour en ur feçon horrubl meurbed.

Var ton Christ bras ar Vur.

TOstait oll, Bretonet demeus a bep andret,
Gant calz a attantion hac ur galon mantret
Evit selaou ar Vuez a Zant Roc ar merzer,
Ha disqi dont d'er pedi dre oll e peb qarter.

Ebars er bloa daouzee cant eiz ha pêvar ugent,
Er guær eus a Montpellier, evit rêi da entent,
E c'henas ar Sant bras-mâ dre ar c'hraç a Jesus,
Hac hed e oll yaouanqis voe ur squer a vertus.

D'an oad eus a ugent vloas en devoe calonad,
Rac coll a eure neuze hac e vam hac e dad;
Lezel a rejont gantàn nombr bras eus a vadou,
Mes qementse na rê mann d'apesi e ganvou.

Ar Sant bras-mâ a glasqe un heritach caeroc'h,
A blije mui d'e galon, dre m'oa preciussoc'h:
Distribue a eure e vadou d'ar beorien,
Hac e renonças qerqent d'an oll bompou terrien.

Neuze en em deguisas evel ur pelerin,
Hac e qemer e secret hent Rom hep nep chagrin,
Evit mont da visita beziou an Ebestel

Sant Pèr ha Sant Paul placet en o ilis santel.

Pa erruas en ur guær hanvet Aquapendant ,
E clêvas voa ar Vocen eno incontinant ,
Pehini a rê mervel calz a dud a bep oad ,
Ar pez a rê spouroni hac a sclassé ar goad.

Presset gant an desir bras da vont da asista
An dud qèz-se affliget ha da sacrifia
E vuez en exerciç ar garantez vrasàn ,
En em laqas gant fervor da sevich an dud clàn.

Dre ma zoa qen yaouanc voe dezàn conseillet
Nonpas en em exposi qementse d'ar c'hlénvet ;
Mes nobstant ma vouie mad e zoa qen dangerus ,
E sicoure mui ous mui an dud clàn maleurus.

Ah ! emezàn , pez boneur a vez evidon-me
Dont da ur bloas varnuguent d'echui va bue ,
Dre garantez vit Jesus a roas e hini
D'an oad a dri bloaz ha trêgont evit dont d'horsalvi.

Mes Doue a venigas ur garantez qer bras ,
Ha dre vertuziou Sant Roc ar Vocen a cessas ;
Ar yec'hed qer precius a rên dre oll e qær ,
Ma red ar bobl oll e foul d'adori hor Zalyer.

O veza neuze clêvet penaus voa ar Vocen
O tistruch horrublamant ar guær a Ceseen ,
E redas da gass sicour dî gant ampessamant
Gant ar gourach vel en doe e qær Aquapendant.

E brezañç hep qen neuze a chasse ar c'hlénvet ,
Ha dre e c'hraç voe qerqent Ceseen delivret.
Diredet rêt da velet ar pelerin santel ;
Meur a hini a sonje penaus e zoa un Æl.

Eus a Ceseen neuze e Rom en embrentas

D'ober e zevotion gant fervor meurbel bras ;
 Ha gerqent e partias , o vale diarc'hen ,
 Ha n'en em veve bepret nemet dre aluzen.

Rentetebarsen urc'hoad, en em santas clàn bras ,
 Hac e renqas arreti eno var ar yeod glas ;
 Mes Doue a bermetas ma zê ur c'hi bemdez
 Da gass dezàn ur bara vit souten e vuez.

Abars ur pennad neuze en e vro voe rentet ,
 Mes e habit voa qen paour, e visach qer chenchet ,
 Na voe qet anavezet en tout gant un nep den ,
 Hac evel un ispion en arretjot souden.

Neuze dirac ar gouarner ractal e voe casset ,
 Pini voa dezàn eoutr, mes n'en anaye qet :
 Goulen a ra e hano hac a bez bro e zoa ;
 Mes dre güir humilite na responce netra.

Sant Roc n'en devoa qet c'hoant beza anavezet ,
 Ha na zezire nemet beza humiliet ;
 Na glasqe nemet souffranç , mortification ,
 Hac e voa leun eus a joa p'oe casset d'ar prison.

Laouen ous en em velet er fêçon-se trêtet
 Ebars en e vro memes hac ivez exposet ,
 Na heané nos ha deiz en ur bedi Doue ,
 Hac e cave e voneur en e gaptivite.

Hac evel pa na vize qet an devaligen
 Ha diesamant e brison suffisant d'e anqen ,
 E pratique c'hoas varnàn a bep seurt tourmaouchou ,
 Evit plijout mui ous mui da Roue an ênvou.

Erfin goude beza souffret gant calz paciantet ,
 Er prison an tevalla epad pomb bloas bepret ,
 E varvas enni er blæs trizec cant a trivaç'h ,

Da bêvar bloas ha trêgont, ur C'hrist en e zivrac'h.

Neuze, goude e varo e voe anavezet

Dre ur merv en doa varnàn aboe ma zoa ganet ;

E eontr a laqas sevel d'e enor un ilis

Hac e c'halvas beleyen vit ober an ofiç.

Gant calz a solanite e nombr eus a vroyou

E celebrer gouel Sant Roc dre a bep seurt vœuyou.

Ar seitec eus a vis Eaust eo fixet an deiz-se :

Bezomp soignus, Christenien, d'e observi ive.

E bedi rêr d'hor preserv oll demeus ar Vocen,

A zoug dre oll an distruch etouez ar gristenien.

Pedomp-en ta, Bretonet, da zont d'hon dilivra

Dious ar Vocen horerus so o rên er vro-mâ.

FIN BUEZ SANT ROC.

REFLEXION.

Pa vez ur c'hlénved terrubl diguezet ganeomp-ni,

E reomp oll hor possubl vit en em breservi ;

Qemer a reomp pep soign da zifen hor c'horfou,

Mes ha ni a ra qement evit hon eneoù ?

Preciussa tra gouscoude e zeo sur hon ene,

Hac vit e savetai e tlemp sonch nos de

Penaus hor c'horf na bado nemet nebeud amzer

Mes hon ene vo eternal dindan sell hor Salver.

PEDEN DA SANT ROC.

O Doue ! c'houi pehini en devezs prometet

Da Sant Roc, ho servicher, pa vije invoqet,

Dilivra peb guir devot scœt gant ar Vocen :

Sellit a druez bremâ demeus ar gristenien.

PEDEN DA SANT SEBASTIEN.

O Doue oll-galloudus! ni ho ped dre veritou
 Ho merzer Sant Sebastien da selaou hor c'hîlêinou;
 Bezit misericordius hirio en hon andret,
 Hac oll demeure ar Vocen ma vezimp dilivret.

PEDEN DA SANTEZ BARBA.

O Doue oll-buissant, c'houi pini c'heus choaset
 Vit hor c'honsolation Santez Barba beniguet,
 Deurvezit hor preservi demeure ho teir goalen:
 Ar Brezel hac ar Guernez hac ivez ar Vocen.

LITANIOU EN AMZER AR VOCEN.

Jesus, eus a Nazareth, Roue ar Judeviên,
 O tiltr an triomphussa, pellait ar Vocen;
 Doue santel, Doue crén, Doue misericordius,
 Ho pet truez, ni ho ped, ouzomp, tud maleurus.

Santez Mari, Mam Doue, concevet hep pec'het,
 Ho madelez infinit hor protejas bepret;
 Deurvezit, ni ho suppli, sicour oll ac'hanomp,
 Hac er Vocen mortel-mâ ho pet truez ouzomp.

Sant Joseph, santez Anna, sant Ælez Gardien,
 Sant Roc, ha sant Nicolas, ha sant Sebastien,
 Ni ho ped a vouir galon da bedi evidomp,
 Evit demeure ar Vocen delivra ac'hanomp.

Sant Charles Boromee, sant Frances-Xavier,
 Santez Angel, sant Viçant-Paul, bezit e peb auzer
 Hon advocadet puissant etal Roue an tron,
 Hac er pedit da rei deomp e venediction.

Santez Barba, sant Patron demeure hon escopti,
 Ha c'houi ive sant Patron demeure hor barres-ni,

Intercedit oll Douc evit ar gristenien ,
 Ma vezimp prest delivret dious maleur ar Vocen .

R E F L E X I O N O U .

O qer eus a Vontroulez penaus oude goasqet ,
 Dre ar Vocen maleurus , hac ive desolet !

Na veler dre ar ruyou nemet antêramanchou ,
 An oll a zo consternèt en glac'har , en canvou .

Tadou , mamou , bugale , breudeur ha c'hoarezet ,
 A zo scòet d'ar maro ebars creiz o yec'hbet :

Ar Vocen horrubl a ziscar an dud eus a bep oad ,
 O pebes calamite ! ô pebes calonad !!!...

Nac a dadou zo privet demeus o friejou !

Nac a vamou qer ive eus o bugaligou !

Nac a vreur , a c'hoar a renq dônt d'en em separi !

Ar Vocen horrubl a scò oll dre ur maro cri....

Ha c'houi ive , Lannion , ha Brest coulz ha Qemper ,
 Allas ! maleurusamant , c'houi bartach hor mizer :

Ho contreou vel hon re a zo ive scòet

Eus ar Vocen maleurus pini ra tro' a bed .

Deut da guemesq ho taelou assambles gant hon re ,
 Ur seurt douçder a gaver oc'h ober qementse :

Mes dreist oll , ni ho suppli , va breudeur , va brois ,
 Da bedi Doue da bellât ar voalen a gastis .

O Va Doue , pegueit so hor boa oc'h ancouêt !
 Ne voamp-ni oll occupet nemet a draou ar bed .

Ret e voa ta d'ho coalen donet d'hor c'hastia ,
 Vit hon laqat da ober hon dever er bed-mâ !

Na velet dre bep contre nemet direligion ,
 Na voa mui en hon touez nep seurt devotion ;

Mes ar goalen a gatis gant dorn Doue lancet
 En deus qerqent pulluhet orgouill an insancet.

Den vên, leun a aroganç, stou da benn orgouillus
 Dirac ar merc patant-mâ e us a goler Jesus.

Petra e zout-te bremâ gant da oll vombançon ?
 Urzell hep qen a Zoue agônfont da c'hrandeuriou...

Mes sell madelez da Vestr, ha dired etrezàn,
 Pardon a ra deomp oll qement so eneptàn:
 Deomp oll d'e implori e treid e auteriu,
 Evit obten ar pardon demeus hon oll fautou.

O pebes caër chenchamant a velomp-ni hirie,
 Er c'hæriou ha var ar meaz coulz hac e peb contre,
 Oll ha paour ha pinvidic, carguet a vadelez
 Evit sicour gant ardeur peb den en dienez.

Ar pinvidic a veler o visita ar paour,
 Na esperu vit e sicour poan, na dillad, nac aour;
 Nac an aoun da veza scòet ivez gant ar Vocen,
 Na velont dirac dezo nemet breudeur christen.

Ar paour, demeus e gostez, en defot a arc'hant,
 A zo nos-deiz o soigni e vreur qer languissant:
 Anfin, an oll zo dougnet gant ur galon dener
 Da zouguen a bep sicour d'ar paour en e viser.

Sellit hon oll bêleyen, güir vinistret Doue,
 Epad an nos hac an deiz e maint tout var vale,
 O redec e peb qarter gant güir devotion,
 Da gass d'an dud bocennet sicour ar religion.

Admiromp amâ ivez courach ar seurezet,
 Pere continuellamant zo o redec bepret
 Evit mont da soulagi e peb ty an dud clàn,
 Hep qemeret ur moment da zont da heanàn.

Sonjomp ivez er soign vras eus an autoriteou ,
 O deus ar bras sourei eus an oll ezomou ;
 Tout e zint leun a gourach evit sicour peb den
 A ouzont e paourentez pe clàn eus ar Vocen.

Dre urz an autorite e zeo bet disposet
 Etre peb qarter ervad an oll medecinnet
 Ha pa vez ezom oute en o c'haver diouc'h-tu
 Prest da vonet da zouguen soign d'an dud a bep tu.;

Ebars en hospitaliou ez eus un urz parfet ,
 Dalc'het gant proprete vras dre soign ar seurezet ;
 Anfin , tud a gonfianç zo hanvet tro-var-dro ,
 Evit gant attantion beilli partout dre'r vro.

Admiromp oll , christenien , ebars en hor maleur ,
 Humanite an oll dud unisset vel breudeur :
 Graç ma cuntunuo bepret ur seurt mad oberou ,
 Evit m'en em rentimp oll dign demeus hon Autrou.

Gant ur galon güir sincer, goulennomp ous Doue
 Ma en em rentimp oll dign demeus e garante :
 En em strincomp d'an daoulin , va breudeur christenien ,
 Da c'houlen digant Jesus da bellât ar Vocen.

F I N.

